

AR FALC'HERIEN

DISKAN.

Hep! falc'herien! deut ^{eo} an de.
Kasomp ar falc'h en dro fete!
En e logen, ar min lemmer!
Ra vo en tremp gant pep falc'her!

Er prajer ^{eo} darv ar foenn,
Arru ^{eo} poent d'ar falc'herien
War ar prat bras gourvez'nean,
Eñ-kreiz an heol da gizec'han.

War ar wrimen en o c'hoaze,
Pevar falc'her war an anne
A skoader gant ar morzol ;
Lemmoc'h ^{eo} r falc'h goude pep tól.

Ar falc'herien, 'korf o rochet,
Pleget en daou 'zo o falc'het.
Ha war o lerc'h ar yeot uhel
A zo laket en eun andel.

O c'heino^{ur} paour a dev bemde^z
Dindan an heol ken didruez:
Mes ^{eo} eul lomm^{ur} jistr, gwech ha gwech all,
A lak o c'halon da dridal.

Gwelet o zal o tidouran
Dindan tomder an heol tomman :
Me^o fevar int tud kalet,
Falc'het 'reont 'vel m'eo ^{eo} deet.

'Maint o sevel o c'hein pleget,
Evit lemman ar falc'h dallet ;
O dremm bepred a zo laouen,
Daoust ma reont eul labour tenn.

Epad an de ar falc'herien
A ro bec'h ha gwall vec'h d'ar foenn :
War o lerc'h, oh! nag a andel
O tifretan gant an avel!

144

Tomder an de a zo ^{kwec'h} ~~kwec'h~~ :
Ar falc'herien ^galc'h da falc'hel,
Ha brema^zonn, a^u zerr-n^oz,
E tisk^{is} font 'n o gwele kloz.

^{HP} ~~HP~~ micher, falc'her, 'zo poan^uz,
Mes bean^e d'ac'h talvoud^uz :
Ma ^uwestlet ho poan da Zoue,
E tigo^ero d'ac'h dor an Ne.

EIL DISKAN.

'Vit an daou boz divezan :

Hep! falc'herien, deut ^o an noz :
Hastomp bu^han mont da renoz,
'Vit bean prest a-benn arc'hoaz
Da beurdre^uc'han foenn ar prat bra^h.

August AR BOURDONNEC,

(Gars Plouillo) ^{er} Skol-Vrezonek Kolaj Gwengamp